

Prizioù lennegel Unvaniezh Skrivagnerien Breizh e Brezhoneg

D'ar sul 1 a viz Here eo bet embannet ar prizioù 2023 e Begerel, da geñver
Emvod Meur an USB/AEB.

Izili ar Juri a oa Josette Bouvet Le Meur, Thierry Châtel, Evelyne Pernel
(prezidantez) ha Michel Priziac evel Prezidant an Unvaniezh.


Priz Pêr-Jakez Helias 2023 :

Degemeret hon eus 7 levr ar bloaz-mañ.


Ar rastellerez bras skrivet gant **Bernez Tangi** (embannet gant **Skrid**) :




Didrouz war an treuzoù skrivet gant **Paul ar Meur**
(Embannet gant **Mouladurioù Hor Yezh**) :




Koktel ar vuhez 3 skrivet gant **Jil Penneg** (Embannet gant **Al liamm**) :




Disoudardet skrivet gant **Lan Tangi** (Embannet gant **Skrid**)




Kan ar Mel skrivet gant **Yannig Audran** (Embannet gant **Al liamm**)



Fulenn skrivet gant **Yann-Charlez Kaodal** (embannet gant **Al Liamm**)



Zadbor skrivet gant **Jerom Olivry** (embannet gant **Al Liamm**)




Levrioù bet meneget :

Ar priz kentañ a zo bet roet da **Yann-Charlez Kaodal**
evit e romant

Fulenn

embannet gant **Al Liamm**



Berr eo an titl met ennañ emañ ar mennozhioù a ren ar romant: ar fulenn enaouet gant tud feuls d'entanañ ur bern keuneud, ha sperejoù an orañjisted... Ur fulenn all 'zo, ar plac'h koant a c'hallo enaouiñ ar garantez e kalon ar paotr...

E rusted ar Bed frailhet gant feulster mab-den omp splujet. E Bro-Siria drailhet gant ar brezel-diabarzh e heuilher Mohamed hag e vab hag a ya war hent an harlu betek porzh Belfast.

Goude en em gav al lenner a-gevret gant Donovan a stourm enep ar re a fell dezhe stag an Ulster ouzh Republik Iwerzhon.

Pa 'ziviz ober e vuntr kentañ e cheñch red ar romant.


Alana O'Neill, ur plac'h hegarat a c'hoarvezo, Bro-Iwerzhon hag he yezh en he c'halon. Hent ar repuidi Sirit a gejo gant roudenn Donovan !

Deskiñ a reer elfennoù pouezus a-zivout amzer-vremañ Iwerzhon: Penaos e vez sellet ouzh ar yezh iwerzhonek diouzh tu an Orañjisted ha diouzh tu an dizalc'herien. Ha ma vefe eus ar yezh ul liamm etreze, a-dreuz enebiezh ar relijionoù ?

Alaouret eo yezh ar romant gant livioù dous ar gwenedeg...

Frammet mat eo an istor. En em zisplegañ a ra gant ul lusk fonnus. Souezhadennoù, kendegouezhioù, kridiennoù aon, poanioù, spi, disamm... an teknikoù-romantour hag ar bluenn a zo bet lemmet mat. Buan e vez lennet ar romant diwar an debron-gouzout o virviñ en empenn al lenner. Ur pennoberenn eo !

An eil da Jerom Olivry
evit e romant Zadhora embannet gant Al Liamm



Dre al levr nevez-mañ e ro Jerom Olivry da Vreizh e romant fantasy, skiant-faltazi. Tri-c'hant pajennad a emgannoù etre gouennoù deuet eus bed Aotrou ar Gwalennoù ! Korred, ramzed, goblinded, orked, majed, erevent, spesoù... Splujet e vezer e mareadoù disheñvel eus istor ar blanedenn Zadhora. Tamm-ha-tamm e komprener piv a zo doue pe diktatour, beleg pe dispac'her.

Tudennoù a cheñch a vennozh, a skoulm emglevioù gant enebourien... Souezhet e vezer a-hed ar romant ! Plijus e vez adkavout, a-dreuz lenn, al lec'hioù resis war ur gartenn vras.

Skeudennoù Christian Goindin a glok mat an destenn da zerc'hel al lenner en hud ar romant.

Gant ur bluenn vrezhonek kaer hag aes da lenn eo bet savet Zadhora. An notennoù dibenn-bajenn a wrizienn al lenner don en aergelc'h faltaziek. Deskrivet brav e vez ar blanedenn hag an darvoudoù a c'hoarvez war dachennoù divent.

An trede da Yannig Audran

evit e romant

Kan ar mel

Embannet gant **Al Liamm**



“Tri deiz goude ma oa bet badezet Zulian (anv e dad-kozh oa Julian) e oa beziet e vamm.”

E 1835 omp. Ganet eo bet en ur familh paour, emzivad, ha dall ouzhpenn-se. Dall dreist pep-tra... Met... diouzh an deñvalijenn e splann ar gouloù. Zulian zo dedennet gant istorioù bet klevet e-pad ar beilhadegoù, hag ivez gant kanaouennoù.

“Pa gleve unan-nevez, ne lakae keit-se anezhañ evit tapet an ton.” Ne oa ket dek vloaz pa grogas da deskiñ seniñ ar flipo « (ar fleüt). Ur souezh : lakaat ar biz kentañ, ha daou, ha tri da stouvañ an toulloù. Stouvañ. Distouvañ. Fallstouvañ meur a-wech ivez.

Distagañ an notennoù. Penaos lakaat an notennoù da heuliañ an ton ? Dre lakaat e galon da gaozeal. Ur marvailh. Evel-se, ha tamm-ha-tamm, gant amzer ha fiziañs, ha plijadur, Zulian e deui a-benn da seniñ e flipo, ha da zigas levenez ha trivliadennoù 'barzh e vuhez, ha 'barzh buhez an dud en dro dezhañ. Ur beaj don e-barzh kalon ur paotr hag a glev ar gwenan o kanañ, pa vez o tañva mel. An istor brav-se, a zo bet savet gant kizidigezh, diwar-benn un den hag ‘a liv an avel gant e vuzik.